

ITRÖN VARIA
A VULAT,

N^o 20.



Petit evidomp ho Map.

E Montrouilles, e ty LÉDAN,
e ru ar Vur.



CANTIC
AN ITRON VARIA
A VULAT.

*Pehini e deveus un Ilis gaër e pares
Pestivien, var un ton neve.*

DRINDET adorabl, me ho ped
Da rei sclerigen d'am speret,
Ma hellin dignamant composi
Eur C'hantic d'ar Verc'hes Vari.

Ho Merc'h e zeo, Tad Eternel,
Ho pried eo, Speret-Santel,
Ha c'hui, Jesus, e deus douguet,
Ha gant cals a boan conduct..

Evelse ho joa ar brassa
Eo ma teuer da publiã
Ar gloar e deus hac ar pouvoar
Er Barados hac en douar.

Ebars en Eê eo curunet,
Ha dreist pep tra eo elevet,

A

A deu oll d'en em soumetti.

Var an douar bemdez ê guelet
 Miraclou par-tout dre ar bed,
 D'ar re a zeu a vir galon
 Da c'houlen he frotection.

Mæs be a zeus certeu plaçou
 Destinët gant hor guir Autrou
 Evit ar Verc'hes henori,
 Ha cavet sicour diganti.

Hep choqi plaç santel ebet,
 Me a souten gant lealdet,
 Penos emedi en or c'hontre
 Ar principala aneze.

Me goms eus an Templ biniguët
 E parres Pestivien batisset
 En oc'h enor, Guerc'hes Vari,
 Eur guir refuch da bep ini.

Ho ty zo, Guerc'hes a Vulat,
 Un ali favorabl ha mat,
 Ennàn ne ve den refuset,
 Pa beder gant eur feiz parfet.

D'ar re, siouas ! en em gaf dall
 E zeo eur refuch ordinal ;
 Meur a den beuzet ha lazet
 An Ælez inemes dirasi

E deveus bêt ressuscitet.

Mar oc heus ive ur goal brocez,

Qemeret-y da Avocades,

Hac e zoc'h sur e c'hounesset,

Cals en deus-ân bet approuvet.

Mar d'och e danger var an dour

Pedit ar Verc'hes d'o sicour,

Un nombr bras e deus saveteet

E peril de vezâ beuzet.

Ar re foll hac ar re troublet

A sqient hac eus a speret,

A deu da receo ar furnez

Dre intercession ar Verc'hes.

Ar re glân, ar re languissant,

Ar re a guez en accidant,

E Bulat e cafont remed

Souveren evit o c'hlenvet.

An tan goal a-deu da vouga,

Ha pa deuer d'he supplia,

Recour a ret an traou collet,

Pa veut dezi recommandet.

Be a zeus tud pa arru gante

Eur malheur, pe gant o ligne,

Pe eurch oll bras, hep sonch ebet,

A zo evel desesperet.

Ret eo dont d'ho recommandi
 E Bulat d'ar Verc'hes Vari,
 Eno e vezont consolet,
 Hac antieramant confortet.

Ar graguez a ve fors poaniet
 O c'henet o innoçantet,
 A so oll dilivret timat,
 Pa vezont goestet e Bulat.

Ar bec'herien ar re vrassa
 A deu d'en em gonvertissa,
 Hec e tilezont o goal stat,
 P'o recommander da Vulat.

Me rei affirmationou
 Dre ar recit ar miraclou
 Eus ar pez ameus avancet,
 Bezet attantif da glevet.

Un Den dall emeus a Guerien
 A recevas ar sclerigen,
 Da Vulat e oue cunduet,
 Hep conductor eo distroet.

Baillif Caræz pareillamant,
 Rentet dall dre un accidant,
 Ne gasas get a remejou,
 Q'en e oa en ho feunteuniou.

Dre ar vertus eus an dour-se,

Hac ho sicour, guit Vam Doue,
 Ar sciengen a recevas
 Ar vech qenta in o pisitas.

Tost da Voengamp, n'en deus
 qet peit,

E couezas er stang eur buguel;
 E vam pa er gavas beuzet
 A voa evel desesperet.

Un den a iis a deuas,
 E Balat en recomandas,
 Ar bagueli voe ressuscitet,
 Hac ar vam a voe consolet.

Eus a Locornan eur buguel
 Gant pignon an ty o coezi
 A voe subitamant lazet,
 Hac e oll izili toret.

Diadan ar mein cavet maro,
 E teuas e vam de goestio
 Dar pla, caer ma gant ar feiz bras,
 Diac ca's e ressuscitas.

A doñar Gataezur pavsant
 Voch canet injustamant,
 Prest e voa da god e broces
 Po nemras d'avocades.

Gant och eas evit o ciant

Sollicitet ar Verc'hes puissant,

Rac ar raporter en deus bet

En e faveur roet un arrêt.

Neuse e teuas da Vulat,

A bresant e roas e zillat,

Hac ouspen var e zaoulin noas

En dro dar chapel e qerzas

Un noter demeus ar c hontre

D'ur goas a Vael a refuse

Ur guitanç raportet gantâ,

A gonseqanç vias d'an der-mâ.

Rac e faut e represanti,

E c'hêr justic d'e gondaoni;

Da Vulat en em adressas.

An tronos er guer er chavas.

A Galac Dom Louïs ar Ber,

O vont da Rom oue e danger

Da vezi er mor bras beuzet,

Oas o pedi oue preservet.

O lestr gant orach ha tempest

Da anfonci er mor voa prest,

E zent d'en em strinca en dour,

Pa denjoc'h, Guerc'hes, d'osicour.

An avel a ziminuas,

Al lest var ar bar a savas.

Evel m'en em recommandjont,
Ho protection a guefjont.

Eus a vourg Bulat e voa couet
Ur vreg en ur punç don meurbet,
Teir heur e oue cuzet en dour
Pa bedjont Mari d'e sicour.

Incontinent e oue guelet,
Hac er memes amser tennet
Yac'h ha dispos, leun a vue;
Meulet ra vezo Rouanez an Eê.

A Bestivien Fantic Lucas,
Follet hac insanset, siouas!
Mæs qen terrupl, qen a rede
Ar paressiou eus ar c'hontre.

Prest da veuzi en ur stanc bras
Ar Verches er mès e zennas;
Un itron, emezi, var an dour
A velas o tont d'e sicour.

He c'herent evel m'e c'hafjont,
Da Vulat ganti e teujont;
Eno e oue antieramant
Rentet parfet a jugeamant.

An Autrou Lestaurec ive
Pemp mis voe clàn var e vele,
Perclus emeus he izili,

A so bet goestet en e dy.

Hac ebars ar memes instant

En deus cavet soulageamant,

Ha yebet eus e glènvejou,

Ha liberte eus e vemprou.

Un Itron eus a Goat-huel

Privet a sicour naturel,

O languissa gant clènvejou,

C'hui eo, Itron a Gosquerou.

A so er plag-mâ sicouret;

Un dolen a so digasset,

Hac a deu d'e represanti

O c'houlen sicour digant Mari.

Ebars e parres Plougouwer

E crogas an tan en eur guær,

Losqet vije antieramant

Penevedoc'h, Guerc'hes puissant.

Evel ma oue dispartiet

Offrang d'o Chapel biniguet,

E varvas an tan hac ar flam;

Jesus, ra vezo meulet ho Mam.

E Penpoul-Goelo e oa bet

Croguet an tan en eur bern hed,

Ne ellent dont aben d'e laza,

Qen ma deujoc'h d'o asista.

O miracl dign bout remerqet!
 Ar plouz a so bet oll losqet,
 Hep offansi ar greun tec hat,
 Dre ho crag, Itron a Vulat.

Un eugen a yê gant al laër,
 Sellaouit c'hoas eur miracl caër;
 O veza goestet da Vari,
 Ne ellas qet e dransporti.

Ebars en eur roc'h en hent bras
 An eugen e rout a verqas,
 A chom evel staguet outhy:
 O puissanç demeus a Vari
 A Duault eur c'hreg honorabl
 Dre un domach considerabl
 E oa evel desesperet,
 Troublet memes eus a speret.

Dont a rês tud ganti expres
 D'e digas da dy ar Verc'hes,
 Qent retorn e oue cousolet,
 Ha dre ho crag rentet parfet.

Mari Thepaut eus a Vulat
 E poan guenel, oa en eur stad
 Me chredet maro ep douet ebet,
 Guerc'hes, c'hui e deus-i delivret.
 Mæs ne oue qet meconessant,

Rei a ras eur soleil arc'hant
 Dar Verc'hes santel a Vulat,
 Evit dont d'e zrugarecât.

Eur c'hreg en devoa ur bùguel
 Incorrigibl, un den cruel,
 Dont a reas douç, a humor vad,
 Pa oue bet goestet da Vulat.

An Ancien a Blougonver,
 Hervez m'en deus scrifet d'ar guèr
 E Bas-Flandres en ur gombat
 En deus bet sicour a Vulat.

Dâou eus e gompagnunez hep-
 qen,

Dre ho pouvoar, Guerc'hes divin,
 En hac un all so soveteet,
 O devoa deoc'h en em voestet.

Eur feunteun a so er vèred,
 Admirabl bras eo e effet,
 Ous e scarza e teu al lez
 Abondant da bep maguerez.

N'en deus amàn miracl ebet
 Na gaffen c'hoas en assuret,
 Anter-cant evel pepini,
 Re hir e vent da raporti.

Mar plich gueneoc'h eprouvet,

Pa en em guetot affliget,
 Ebars Bulat puissanc Mari
 Biscoas ne vanças da hini.

Evrus oc'h, Pestivienis;
 Henoret oc'h eus un Ilis
 E bourg Bulat, caër ha santel,
 Leun a c'hraçou suraturel.

Epad ar bloas, deiz e goueliou,
 Pardôn so hac indulgeançou,
 O coves ha communia,
 Hac o tonet d'e bisita.

Mæs varlerc h he nativite,
 Ar sul qenta a so ive,
 Emedi caëra pardon so,
 Pelec h ma teu tud a bep bro.

Cresqi' ra ar pelerinet,
 Graçou Mari ne vianaont qet;
 Oll e obtenont o mennat
 E ty ar Verc'hes a Vulat.

Guerc'hes-santel, ni o supli,
 Da guement den a deni d'ho ty,
 Roit ar c'hraç d'o eneou
 Da bossedi oll ar joaiou.

FIN.